

DIROLLET / DIVERGONT / DESTROY

BARA GWIN

K... wevrer 2003 N°2

BARANEWS

Traoù nevez...
Traoù kozh.

WAR HENT

AR BARAD...

Ar c'hoari koukoug displeget
deoc'h gant D. Vronn.

3€50



HA PREST
OC'H DA VOTIÑ
EVIT MISS
BREIZH-2002 ?

MARV EO BECASSINE ?

Marine Piel-Doucen,
ur plac'h "made in Breizh" e Pariz.

BARA GWIN N°2

DIROLLET / DIVERGONT / DESTROY



6 Marine Piel-Doucen



12 Miss Breizh 2002

4 BARA TOMM

**Ar c'hoari koukoug displeget deoc'h gant
D. Vronn. Tomm! Tomm! Tomm!**

6 MARV EO BECASSINE ?

**Marine Piel-Doucen, daou vunut diwar-
benn Breizh hep sizhun war Frañs...2.
Biskoazh Kement-all !!!**

10 BARANEWS

D. Noutou a lâz deoc'h tout...

12 MISS BREIZH 2002

**D. Vergont en deus testet Anne-Sophie
Pajot, Miss Breizh 2002, evidoc'h ...
Pell emañ Yann deus e gazeg !**

15 Stras ha botoù koad

**An Oriant Express :
Daoust hag ur vuhez zo goude ar festival ?**

BARA GWIN

80 straed Massillon, 29200 Brest

Plg: 06 30 07 04 03

Postel: baragwin@voila.fr

Rener: D. Rollet / E karg eus ar skrivañ: D. Vergont mui D. Vronn, D. Noutou, D. Steñget / Fotoioù: gwirioù miret / Maketenniñ
ha pajenniñ: D. Stroy
Moulet gant: APF - Gouesnou (02.98.02.62.52)
Tennet ez eus bet 500 skouerenn eus ar gazetenn-mañ.
Priz un niverenn : 3€50 / Kourmant bloaz: 12€ / Skoazell adalek 20€.



Evit ar merc'hed

"Dañs ar podoù fer komer"

Huchal, krial, skeiñ war ar voger, ober trouz a blij dit. Un tammig zo mat met re... surtout m'emañ tadig ha mammig da Yannig o kousket en tu all d'ar c'haravan, fin... o klask kousket.

Ar pochon plijadur

Poent eo (ha ret eo!) lakaat an tok war kreion da Yannig. Ne blij ket dezhe ober an dra-se o-unan (re ziaes?) "sikour mar plij!"

Ar blev !!!

Ar baotred n' int ket naet ha propr atav, met evite ret eo d' ar merc'hed bezañ dispar, direbech ha... divlev evel just ! N' eo ket just met ...

Yannig zo skuizh e gig...

Ar paourkaezh ne zeu ket a-benn da c'hoari koukoug... Dit da sikour anezhañ, pe da chom gantañ: "n' eo ket strikt, n' eo ket grav, ma "Rocco Siffredi" muiañ karet", gwelloc'h vo ar wech a zeu...

Ema erruet an Anglezed...

Da amzerioù 'peus. Gwelloc'h lâret dezhañ diouzhtu a-raok komañs. Aet zo kuit meur a hini gant seurt traoù...

**ALC'HWEZ BRAS...
AR BARADOZ VIHAN**

C'hoari koukoug, c'hoari koukoug, c'hoari koukoug... boñ, ya, met arabat ober forzh petra (ha forzh penaos!!!). Setu tudoù ar 5 faot brasañ, neuze diwallit m'ho peus ket c'hoant da vont da gousket er c'hanape.

Evit ar baotred

Ar barv mod "Indiana Jones" !

Pikañ a ra spontus, evit ar merc'hed "mazo" hepken.

Amzer zo...

Ar merc'hed o deus ezhomm amzer evit kaout plijadur (tro 20 mn) neuze arabat ober tout e 3 mn, mont da gousket, ha lezel Marijanig da echuiñ hec'h unan...

Diwall paotr yaouank !


Naet, propr ha tout... Ma vez c'hwez ar bezhin gant da ostilhoù e chomo da draoù e-barzh da vragoù...


Arabat c'hoari da Super Star.

"A! Divronn gwenn Marthe! Met da lommoù dit-te zo bihan tout..." Paouez da c'hoari da babor Yann beg bras. Ne blij ket d'ar merc'hed klevet istorioù revr, paotr lous !

Moumounoù, c'hoari koukoug, pokoù...Moumounoù, c'hoari koukoug, pokoù.

Setu an doare! Ouzhpenn ar seks zo er vuhez...





D. VRONN ON LINE

Selaouit 'ta tud yaouank (hag ar re gozh ivez...) !
Piv n'eo ket aet biskoazh da "dchatiñ" war ar "Web" ?
N'ho peus ket komprenet ? Piv n'eo ket aet biskoazh da
doullañ kaoz war internet ?

Met diwallit ! A-raok mont da gaozeal war internet ;
a bep seurt paotred a zo, ha gwelloc'h selaou pater
santez D.Vronn a-raok kregiñ gant an afer. Setu merc'hed
evidoc'h, hag evidoc'h hepken, ma alioù fur :

Da gentañ, arabat choaz un anv bihan re domm (e-
giz "Kazhez vihan", "Mari Zoñv" pe "Sunig bihan"...)

M'ho peus dija ur Yannig er gêr, diwallit ! C'hwi 'vo
tapet, paket gant an tchat, meur a hini eus ma mignoned a zo
dispartiet a-gaoz d'an dra-se, neuze arabat dekoniiñ !

**Merc'hed, arabat klask Tristan, Arzhur, pe forzh
peseurt priñs rak...** n'emaint ket war internet. Aferioù fall
zo da gaout, hag ur bern !!! Met nebeut a baotred a-feson...

Arabat reiñ ho niverenn-bellgomz er gêr !

Natacha, 31 bloaz, Kastellin

"Ur paotr en doa kroget da gomz ganin war
an "tchat". Ur paotr peupré ha komifo, penn bras e
Frañs Telekom. Pellgomz a ra din da noz, c'hoant
en deus dihuniñ ac'hanon bep mintin, ha me 'm boa
gwelet anezhañ hag en doa prometet din traoù
dispar ha tout...

Hag un deiz, ur plac'h he doa komzet ganin
war an "tchat" eus ar paotr-mañ a bellgomze dezhi
bep mintin. Hag ur plac'h all, hag unan all, hag unan
all c'hoazh...

Ha 'benn 'fin, hennezh, ar paotr a-zoare
(sañset!), a save bep mintin da 5 eur da bellgomz
d'un toullad merc'hed ha lâret dezhe memes traoù.
Spontus eo bet vañjañs ar merc'hed !!!

ARABAT !

Arabat respont d'ar baotred a gomañs gant ar P/P/P (Pe oad out ? Paotr pe plac'h ? Pelec'h emañ o chom ?)
Amañ n'eus netra da c'hortoz nemet lâret dezhañ pegen bras eo ho tivronn, pe liv eo ho taoulagad...

Arabat komz hoc'h-unan. Ma ne lavar netra diwar-e-benn, cheñchit !

Arabat respont d'ar baotred gant anvioù bihan evel "Plijadur evidout" pe "Sex King"...

Chloe, 22 vloaz, Roazhon

Ma c'hamaradez Julie he doa kavet unan war ar "Web". 'Oa ket
gwall fier evit mont da welet anezhañ hag he doa goulennet ganin mont
ivez. 'M boa ket c'hoant ha 'benn ar fin oan aet (evit farsal kwa!)

Ni oa aet da evañ ur banne
gant ar paotr. Me a glaske chom pell
rak ma c'hamaradez oa intereset-tre
gant ar paotr. Ha tamm ha tamm em
boa gwelet e oa dedennet ar paotr
muloc'h ganin evit gant ma
c'hamaradez. Aiou, diaes 'vo an
traoù !!!

Plijus e oa an nozvezh , ar
paotr en doa tapet hon niverennoù-
pellgomz, hag aet kuit...

...Hag un hanter eurvezh war-lerc'h e
pellgomz din. Inervet tout "plijout a rez
kalz din, 'm eus ket c'hoant gwelet da
vignonez ken ha tout..." Met ma c'hamaradez oa o paouez lâret din e oa
aet sot gantañ. Petra ober ? Ar responder evel-just !



N'eo ket diaes...

Arabat kontañ gevier. Ma lârit traoù
faos tout e voc'h paket deiz pe zeiz.

War-lerc'h, RET eo goulenn ur foto
digantañ a-raok gwelet anezhañ da
vat.

Ret eo bezañ naturel, fentus, plijus
ha tout. E-giz-se e ya an traoù.

www.caramail.com
www.voila.com
www.sexageville.com

*"Douce France" bep Sadorn da 7^e war
Frans 2 gant Marine Piel-Doucen,
ur plac'h "Made in Breizh"*



MARV EO

6 BARA GWIN N°2

Breizh, Euskadi, Korsika,... war an tele d'ar Sadorn noz war Frañs 2. Biskoazh Kement-all !!! Setu "Douce France", abadenn nevez Christine Bravo. Marine Piel-Doucen zo bet lakaet 'barzh ar jeu evit Breizh. Ur plac'h yaouank eus Plevin, koant ha tout zo aze da gontañ troioù-kaer ar vretoned d'an dud. Un abadenn "Camembert, Krampouezh, Choucroute ha Beaujolais" ? "Nann !" a lâr Marine Piel-Doucen, ur plac'h "Made in Breizh" ha he deus c'hoant da ziskouez Breizh o vont war-raok, Breizh ar re yaouank, an dañsoù, ar c'hanaouennoù, ar brezhoneg... "M eus ket c'hoant da c'hoari plac'h Pariz". Neuze echu gant ar folkloraj, ar "glav a ra bemdez", ar "menhiroù" hag ar bigoudennded ? Deuit da selaou ar plac'h nemeti a gred kanañ ar gavotenn pa vez Star Academy war TF1. Marv eo Bécassine ?

BARA GWIN : Penaos out deut da vezañ "plac'h Breizh" e-barzh abadenn Christine Bravo "Douce France"?

MARINE PIEL-DOUCEN : Ur c'hasting zo bet ur bloaz hanter zo. Da gentañ oa ret kas ur c'hasedig video. Ma gwaz en deus filmet ac' hanon. Aze oa ret kinnig Breizh, komzet 'm eus diwar-benn an arvor hag an argoad, ar Brezhoneg hag ar Gallo. Komzet 'm eus eus Gouel an Erer Kozh ha Gouel Etrekeltiek An Oriant. Hag evit an traoù fall 'm eus komzet deus an aodoù louset gant ar bezhin glas.

War-lerc' h oa bet un emgav, ar pennredakter 'n deus goulennet ganin komz brezhoneg, kanañ e brezhoneg. Kanañ a oaran mat met komz flour e brezhoneg zo diaes din. Goude 'm eus bet un emgav gant Christine Bravo hag ar broduktourez ha setu.

E miz Eost paseet 'm eus bet un emgav all da lâret din oan bet choazet.

"Diskouez Breizh ar gwellañ posubl"

Penaos 'vez fardet ar gronikenn, ar reportajoù?

Din eo da glask an traoù nevez 'vez graet e Breizh hep disoñjal ar gizioù kozh. Da skwer, 'pad an abadenn gentañ 'm eus komzet deus Paskal Goaven en deus savet skol "broderie" Kemper, hag ijinet dilhad diwar an dilhad glazik. Pe mont me ha paotr ar c'hamera, da welet ur peizant e Brasparzh hag a ra abadennoù muzik 'barzh e graou.

Kazetennerien ar vro a sikour ac'hanon, ma familh ivez. Evidon eo a-bouez-tre kaozeal mat deus Breizh, ar brezhoneg, deus ar gizioù kozh ha tout.

Evit ar brezhoneg vo ret din adkregiñ ganti. Restajoù mat am eus met n' eo ket a-walc' h da gaozeal gant an dud.

"Biskoazh ne oa bet brezhoneg d' ar Sadorn noz da 7^e war Frañs 2"

Pouezus eo distripañ un tamm brezhoneg 'pad an abadenn "Douce France"?

Ya, labourat a ran un tammig a-raok an abadenn, hag e-giz-se e c'hellan komz pad an abadenn. N' eo ken 'met restajoù, met boñ "restajoù mat zo mat da gaout".

Mat eo seurt abadennoù evit Breizh?

Biskoazh ne oa bet brezhoneg d' ar sadorn noz da 7^e war Frañs 2. Pezh zo mat dija. Ret eo diskouez eo bev ar Brezhoneg, eo bev Breizh. Aet on skuizh o klevet n' eus nemet glav, tud vezv ha tud kozh e Breizh. Din-me da cheñch penn d' ar vazh, da ziskouez traoù all. Din da ziskouez Breizh o vont war-raok evit ar sevenadur, ar beizanted, an dud. Atav em eus bet brezhoneg em skouarn, gant ma mamm, ma zud kozh. Bremañ omp fier da vezañ bretoned, met an dra-se zo nevez tout. Ha mizer en deus bet ar brezhoneg 'pad pell, pa yae an dud da Bariz ne lârent ket oant bretoned, rak e oa un tammig "Bécassine o vont da gêr vras". Met a-drugarez da dud evel ma mamm, a-drugarez d' ar stourmerien eo echu. Breizh n' eo ket ur vro evel ar re all. Ni zo ur bobl, ur bobl en deus poaniet kalz, ur bobl a gan kalz, ur bobl laouen ha bev.

BECASSINE ?

Penaos emañ an traoù gant ar re all?

Mont ar ra mat gant paotr Euskadi pe hini Korsika peogwir hon eus ur yezh ha goulenn a reomp

Petra soñjez eus TV Breizh pe Frañs 3 Breizh ?

Devezh kentañ TV Breizh a oa un dra dispar.



“Din -me eo d’ober an traoù diwar-benn Naoned”

Gwelet Dan ar Bras, ar C’hoarezed Goadeg pe Alan Stivell 'oa dreist. Abaoe ar bloavezhioù 70 ez eus tud hag a stourm evit Breizh hag ar brezhoneg. Deut int a-benn da gaout ur chadenn tele.

Etre an devezh kentañ ha bremañ, lod zo bet dipitet bras gant TV Breizh (gant an nebeut a vrezhoneg

memes traoù. 'Pad an abadenn gentañ, unan en deus komzet deus hon trefouedaj, hon "patois", hag aze hon eus savet tout asambles hag huchal "ur yezh eo, n' eo ket ur "patois".

Ret eo stourm atav evit ar brezhoneg, ar skolioù Diwan. Din da lakaat ar muiañ posubl a vrezhoneg 'barzh an abadenn. Klask a rin komz diwar-benn ar Gallo ivez.

Ha gant paotr ar "Pays de loire", penaos 'vo ma vez un dra d' ober diwar Naoned?

Aze vo reuz, emgann a vo rak din-me eo d' ober an traoù diwar-benn Naoned.

dreist-holl...) Petra soñjez ?

N' on ket dakord, a-dreñv TV Breizh emañ TF1, ar re-se a fell dezhe rastellat arc'hant. TV Breizh zo gwelloc'h evit netra. Pa oa bet savet Skol Diwan Sant Brieg gant ma mamm 'oa ken 'met div skoliadez, me ha ma c'hoarig. Ne oa sikour ebet, tout an dud a lâre: " Setu ar breizhoù !" paket he deus kalz met 'benn ar fin, Skol Diwan Sant Brieg zo unan deus ar re vrasañ.

Klask a ran ober memestra gant "Douce France". Stourm evit Breizh, diskouez Breizh ar gwellañ posubl. Lâret 'm eus d' ar pennredakter 'm boa ket c'hoant lakaat bragoù jeans gant koef ar vro

Vigoudenn. Ha dakord int ganin war an dra-se. Ne 'm eus ket droed d' ober seurt traoù. Ma kaozomp eus ar gizioù kozh vo graet traoù sirius, traoù mat... pe ne vo ket graet tamm ebet.

Ma lâran dit...

BARA GWIN

botoù koad...
Naoned...
Pariz...
foot...
gavotenn...
Christine Bravo...
pellgomz...
biniou...
gwenn...
c'hoari...

...e lârez din

MARINE PIEL-DOUCEN

...mamm gozh
...Breizh
...Bécassine
...war-raok Gwengamp
...fest-noz
...plac'h chik
...ma mamm gozh goude an abadenn
...bombard
... du
...evit ma zud kozh "les chiffres et les lettres"

Setu merc'hed (ha paotred !) ur c'hollektor!
An abadenn nemeti gant brezhoneg ha gant
David Charvet. D. Vronn, D. Stroy ha D.
Wan a ginnig deoc'h "Frañs Dous" : Sex,
brezhoneg ha rock 'n roll !

KROGET EO !

D. STROY

" Ar muzik zo hini "Douce France" doare tekno,
digomprenus tout."

D.WAN

" Un tour-tan, ur c'harr-nij, an traezh, ur vuoc'h,...
mankout ar ra an Tour Eiffel ha Menez Sant-Mikael..."

D.VRONN

" Serrit ho peg un tammig !"

03'13 : SETU MARINE PIEL-DOUCEN

D. STROY

" Breeeeeeeeeeeizh !"

D.WAN

" Puten c'hast. Gwelet 'peus an
divronn ?"

D. VRONN

" Heñ ? Petra zo ?"



Plac'h Pariz

11'38 : ...SPORTOU

D. STROY HA D. VRONN

- Oc'h ober Ragoût muzelloù -

D.WAN

" Ur scoop a zo ! Ar vretoned a ra
kement a sport ha tud Lyon."



Paotr an Euskadi

26'47 : BREIZH WAR AN TELE !

D. STROY

" D. Wan ! Pellgomz da vamm-gozh,
emañ Kelc'h Keltiek Rostren war an tele !"

D. WAN

" Ma mamm-gozh n'he deus ket tele ebet"

D. VRONN

" Ar Fisel zo gwelloc'h evit ar Step, ha
marc'hadmatoc'h evit ar "Moving".



Paotr Korsika

51'00 : POENT EO OBER BRUDEREZH !

D. STROY

" Petra 'ra David Charvet dija ?"

D. WAN

" Labourat a ra war an tele gant merc'hed o
reded war an traezh, 'm eus aon..."

D. VRONN

" ...E Sant Pabu ?"

D.WAN

" Nann ! E Malibu !"

DOUCE FRANCE

00'40 : AN DEN PEDET

D. STROY

" A'ta ! Hino emañ Christine Bravo gant David Charvet. Tomm !
Tomm ! Tomm !

Klask trot a raio, sur !"

D. WAN

" Goude pevar bloavezh "Union Libre" eo
nui c'hoazh Christine Bravo gant ar
saozneg."

D.VRONN

" David Charvet, Waw..."

8'13 : FENOZ E VO...!

D. STROY

" Hopala ! An abadenn vo diwar-benn ar
sportoù. D. Vronn ! Ro din ar chipsoù !"

D. WAN

- Aet d'ar priveziou -

D. VRONN

" Plac'h ar Reunion a zañs brav !"

24'41 : PET EUR EO ?

D. STROY

" Lak TV Breizh. Marteze vo gwelet
Buannic 'ba' Actu Breizh."

D.WAN

" Paquez ! O labourat emañ !"

D.VRONN

" Ran ket four gant Buannic. Me blij din ar baotred
postek ha paotr an Euskadi zo brav ! Fuilhet
mat ha tout !"

28'00 : AR STATISTIKOU

D. STROY

" Tud Lyon a bren muioc'h a votoù "Nike" evit ar
vretoned ?"

D.WAN

" Graet o deus ar soñdaj e Bro Leon."

D. VRONN

" Kae da sutal !"

56'00 : AR FIN !

D. STROY

" Ac'hanta ! Marine Piel-Doucen zo o tañsal ar siow gant paotr
Korsika."

D. WAN

" Self ! Pignet eo war e zivskoaz bremañ !"

D. VRONN

" Echu eo dija ? Piv a bellgomz evit ar pizza ?"

Seksiañ Brezhonegerez...



Setu paotred, skrivet 'peus, votet 'peus, ha setu an top 5 evit poent:

1) **Goulwena An Henaff**, plac'h an tele.
 2) **Nolwenn Corbel**, aktourez e brezhoneg "Ar seksiañ brezhonegerez" eme Fri domm, animatour Radio Kerne

3) **Jane**, kelennerez saozneg e Gwened "hag he deus lakaet holl bazhioù skolajidi Gwened da zañsal ar "gymnaska", eme ur skolajiad.(gant ar vezh !)

4) **Erell**, animatourez radio.


5) **Trifin**, kelennerez brezhoneg e Roazhon "ur goantenn ma' z eus", eme un admirer dizanv.



...ha seksiañ Brezhoneger

A' ta merc'hed. Poent eo deomp respont d' **Ar goulenn**: Piv eo seksiañ brezhoneger ar vro ? Me zo sot gant kaner Meuriad met boñ... ma teu Denez Prigent 'ba 'r gêr ne chomo ket da gousket war ar c'hanape..... Ha c'hwi? Skrivit deomp 'ta da lavaret deomp ho soñj war an afer.

BARA GWIN/
 Seksiañ Brezhoneger
 80, straed Massillon
 29200 Brest
 Postel : baragwin@voila.fr




N'EO KET KER !

An ticheurt "Ya d'ar vBrezhonegayrien" zo da brenañ digant Bara Gwin. Da c'hortoz ar "Breizh Pride" kentañ pe da vont d'ober froti-frota en toull-noz.

9,90€ - Bara Gwin 80, ru Massillon 29200 Brest

Aotroù ar gwalennoù An daou dour



gant Peter Jackson
diwar levr J.R.R. Tolkien

Ur film gant:

Korriganed (kalz!), Elfed, Tud drouk (ur bern), Tud jentil, Triskelloù (re!), Merc'hed (pas a-walc'h), ha gwalennoù.

An istor:

Aet eo kuit Gandalf ha marv eo Boromir. Tri strollad zo bet graet gant ar geneiled hag-i da vont war douaroù ar c'hreiz, leun a vagadoù orked hag an uruk-haised (hag a zo ur meskaj spontus etre an orked hag an elfed). Frodon ha Sam a zo war an hent da Mordor ha da skalf ar blanedenn, dezho da daoler ar walenn e-barzh. Merry ha Pippin zo bet kidnapet gant an orked, ha setu-i e-barzh ur c'hoad drol tout. Ar roue Theodem a Roc'han zo 'vont da stourm a-enep ar re zrouk gant sikour Gimli, Aragon ha Legonas. M' ho peus c'hoant kompren un dra bennak, prenit "Première" pe "Studio".

Pemp rezon da vont da welet ar film :

- Distro Gandalf, kreñvoc'h, brasoc'h, bravoc'h ha tout...(met hep ar marc'h ruz!!)
- Gwelet ar Roue "Théodem De Rohan", breur kuzh

Josselin ?

- Tri c'hard eur emgann etre an elfed hag an orked.
- Gwelet 'peus "Sissi imperatrice" dek gwech dija ha n'eus netra all war an tele da Nedeleg.
- Te zo sot gant triskelloù "Toulhoat".

Aotroù ar gwalennoù - An daou dour : adalek an 18 a viz Kerzu 2002



Koumanantit da BARA GWIN

Evit koumanantiñ, kasit ar baperennig-mañ da Bara Gwin (pour s'abonner, renvoyer ce coupon à)

BARA GWIN 80 straed Massillon 29200 BREST

Anv bihan:.....Anv:.....

Chomlec'h:.....

.....Pellgomz:.....

Koumanantiñ a ran, amañ kevret ur chekenn a €

KOUMANANT BLOAZ 12€ - Skoazell adalek 20 €



PREST OC'H DA VOTIÑ

D'ar 14 a viz Kerzu 'po tro da votiñ evit Miss Frañs. Champagn, Bikini, ha kouign-amann a vo war an tele. Ha tro unnek eur hanter 'vo dilennet Miss Frañs 2003.

BARA GWIN en deus testet evidoc'h Anne-Sophie Pajot, Miss Breizh 2002, Plijout a ra dezhi beajiñ (evel-just), ar festoù-noz gant Tri-Yann (?), ar champagn ha tout.

Lennit... ha Votit!

BARA GWIN : Penaos oc'h deuet da vezañ Miss Breizh?

ANNE-SOPHIE PAJOT : Me 'm eus komañset gant ar votadegoù evit "Rouanezed an Naoned". Me zo bet Rouanez an Naoned e 1999, ha goude 'm eus graet koñkourioù "Miss" ha 'benn ar fin on aet war ar renk evit koñkour Miss Breizh hag aet eo ar maout ganin!

Petra zo bet cheñchet en ho puhez bremañ ma' z oc'h Miss Breizh ?

An dud a oar on Miss Breizh a gomz eus an dra-se ganin. Evit poent em buhez, mont a rin kuit evit koñkour Miss Frañs e fin Miz Du. Evidon vo ur miz dispar. Gwelet a rin tud deus pep lec' h e Frañs. Met me, ne 'm eus ket cheñchet, me a chom Anne-Sophie Pajot.

Penaos eo bet an traoù gant an Itron De Fontenay?

Mat-tre. Debret 'm eus ganti an deiz war-lerc' h votadegoù Miss Breizh. Honnezh a ra war-dro he missed. Goulennet he deus penaos oa an traoù ganin, hag-eñ e oan plijet ha tout...

EVIT MISS BREIZH 2002 ?



Ur mister Breizh a zo ? (Ni zo un tammig fri-furch!)

Ya, ur mister Breizh a zo.

Petra eo labour ur Miss?

Miss Breizh a zo skeudenn Breizh, ar vretonez hag ar bretonezed. C'hoant am eus diskouez e c'hell ar merc'hed yaouank bezañ koant ha speredek-tout, ha prest da gaozeal diwar-benn forzh petra.

Penaos 'peus bevet ar reuz zo bet gant afer ar miss Frañs, ur miss oa bet lavaret e oa ur paotr ?

An dra-se zo bed ar missed, memestra eo e bed ar sportourien. Amelie Mauresmo oa bet lavaret e oa ur paotr ivez. Pa vezit brudet 'vez atav tud da gontañ traoù fall diwar ho penn. An dra-se zo nul.

Petra, soñjit eus ar pezh he deus graet Melanie Guyomard (Miss Breizh 2000) oa aet da vanifestiñ evit Naoned e Breizh, fachtet bras oa bet an Itron De Fontenay.)

N' eo ket gant ar pezh he deus graet eo bet fuloret an Itron De Fontenay met peogwir n' he deus ket goulennet an aotre a-raok. Me 'm eus ket c'hoant d'ober politik. Me zo deus Naoned ha me zo bretonez.

Miss Breizh 2002 :

*Anne-Sophie Pajot

*21 bloaz

*Deus ar Gilvineg

*O chom e Le Cellier (ugent kilometr eus Naoned)

*BTS "pakañ touristed" (pe "tourista" mar kavit gwelloc'h ...)

*Studierez war ar yezhoù



JENOVEFA ATAO !

KENTOC'H MISS EGET BREIZH

Kwiz Breizh ha kwiz Miss evit Anne-Sophie Pajot, Miss Breizh 2002. Labour zo c'hoazh...

kwiz Breizh

2,5/8

Piv oa Anna Vreizh ?

Dukez diwezhañ Breizh

Petra zo war banniel Breizh ?

Erminigoù Naoned, fin erminigoù Breizh.

Peseurt anv en deus ar banniel ?

Penaos ?

Peseurt anv en deus ?

Petra ?

Banniel Breizh !!!

Euh, n' ouzon ket .

Pelec'h emañ kastell Duked Breizh?

E Naoned

Piv eo President Kuzul Rannvro Breizh?

euh...n' ouzon ket.

Pet departamant zo e Breizh?

Beñ 4.... hervez ar melestradurezh, met 5 hervez an istor.

Hag hervez Miss Breizh?

.....Pevar hanter.

kwiz Miss

8/8

C'hwi zo kentoc'h plac'h an toullou-noz pe plac'h ar c'homisoù agrikol ?

Plac'h an toullou-noz

Plac'h an tatouñ pe plac'h ar piercing ?

Plac'h ar piercing

C'hwi a blij deoc'h kentoc'h paotred o slipoù pe paotred o c'halsonoù ?

Paotred o c'halsonoù

C'hwi zo kentoc'h plac'h he bragoù bihan pe plac'h he stringoù ?

Plac'h he stringoù

C'hwi zo plac'h "Popstars" pe "Star Akademi" ?

Star Akademi

Gouel an Erer Kozh pe Gouel Etrekeltiek An Oriant ?

Gouel Etrekeltiek An Oriant ,

C'hwi zo plac'h he banne champagn pe plac'h he banne chistr ?

Plac'h he banne champagn

Plac'h an eured pe plac'h ar "pacs" ?

Plac'h an eured.

Roit deomp anv deou borzh e Breizh mar plij !
Euh... ar Givineg, An Oriant ha Cherbourg

Petra soñjit eus muzik Breizh?

Me zo sot gant ar festoù-noz

Peseurt strollad pe kaner a blij deoc'h ?

Tri Yann.

AN ORIENT EXPRESS...

“ An Oriant zo divalav, vil ha nul. 'Peus ket 'met gwelet, tout an dud a guit An Oriant da vont da “Saint barth” gant o bagoù bras. “D.Steñget zo chomet evit Bara Gwin ha plijadur zo bet. Ouzhpenn ar binioù hag an douristed zo er vuhez.

9e00: Digemer mat e bro An Oriant. N' oc'h ket sot gant an tiez mod “Staline” ? Deomp war Enez

Groe gant ar vag neuze. Ur banne chokolad en Ty Beudeff ha deomp d' ober un droidad war velo... 45, *straed General de Gaulle, Enez Groe, Plg : 02 97 86 80 73.*




4e15 d'enderv : **Tomm eo an amzer!** Evit Diskuizhañ pe ober traoù all... ar **Korosko** zo ur sauna evit an holl baotred ha merc'hed d'ar Gwener ha paotred nemetken en deizioù all. Sauna, jacuzzi ha hamman,... ha pochonioù plijadur. Gwellañ sauna zo e Breizh.18 *straed Lazare-Carnot, An Oriant Plg : 02 97 35 07 50*

7e45 noz : Sec'hed ho peus ha naon ho peus adarre (dija)! Neuze n'eus nemet ul lec'h evidoc'h. **Tavarn ar Roue Morvan.**

Bier eus ar chentañ, boued mat. Bep Gwener noz e vo musik ha kalzig ha dud ivez. Ar “must” evit y a n' Breznoneger. 17 *straed Poissoniere, An Oriant Plg : 02 97 21 61 57.*

12e00 : Tandori, ti ka, Biriani, ... Echu gant ar chouchenn hag ar c'hrapouezh, setu-c'hwi distro en Oriant, en **Diwana**, ur preti indian. Boued mat, tud simpa ha tout...

53, *straed Jean Jaures, Lannar-ster - Plg : 02 97 76 04 47*



2e00 d' enderv. **Fort Bloqué** pe ker kunu? Fort bloqué evit c'hoari krapouezh gant mammgozh ha tout ar familh pe ker kunu evit ar c'hoari krapouezh “integral”. Gwelloc'h mont d' ar gKigenn kleub (“moving” ar vro) a-raok...



01e30 noz : Mat ! Poent eo cheñch, gwelet pennoù all, ha selaou sonerezh mat. Echu gant ar binioù kozh (poanskouam am boa dija met bremañ...)! En Oriant ez eus choaz, met “**La Piscine**” (pe ar **Poull Neual**) n'eo ket fall, tamm ebet. Al lec'h gwellañ memes evit paotreda ha merc'heta... pe ar c'hontrol. Pep hini e vutun!... 101 *bali*

Cosmao-Dumanoir, An Oriant-Plg : 02 97 37 65 26

Te zo sot,
ha me zo fin, te a
lenn "Libé" ha me
BARA GWIN

BARA GWIN
lenn "Libé" ha me
ha me zo fin, te a
Te zo sot,